

PARREZ REDENE

12

Eur brezel kri breman siouah !
E ve groet d'er gristenian c'hoah :
Hor fei, hon Doue, hor Zalver
Zo goalgasset hed an amzer.

13,

Zant Kornely, doh tal Doue
Groeit ar'nimp eur zel a druhe
Zikouret ni drej hou peiden
Ha deit ho kenon d'hon diwen

14

Tolet eveh ar hor loned,
Dioualled-he doh peb klenwed :
Obtenet dimp pe goehimp klanw
Yhed er c'horf hag en inanw.

15

Ha pa zono heur er maro,
Groeit ma c'hellimp, ni oll d'hon tro
Nijal eldoc'h, get an œled
Ewit meuleign Doue berped. Amen.

IMPRIMATUR :

Quimper, le 6 Avril 1908.

F. CORRIGOU, vic. gen.

KANTIG SANT KORNELY

Diskan



Ni hou peid oll zant Kornely
En haon Doue zikouret ni :
Arnimp oll hag or loned
Dalc'het hou torn atao stennet.

1

Tud Redene, ba hou parrez
Zo meur a zant hag a zantez :
Mei ewit diouall ho madaou
El Kornely ne peuz chet daou.

2

Ganet eldoc'h ar er meziaou.
Heon velaz abred ho poaniaou :
Lakeit arlerc'h penn an Ilis
Da draou en Enw heon ouiaz priz.

3

Etal ker Rom, en Itali,
Ema ganet zant Kornely :
Eno kreskaz, korf ha spered,
Etousk e dud hag i loned.

4

Haonet da bab en on amzer,
Ha bep sort drouk hag a zanjer,
Heon e c'houniaz, dre c'hras Doue
Ar an ivern hag i Roue.

5

Daou vanac'h fall hag ourgouilluz
A zawaz eur brezel spontuz,
Ewit hen diskar doh i dron
Ha kemer e lec'h ho-c'henon.

6

Harpet ar leor an Aviel,
Dre zikour ar Spered-Santel,
Zant Kornely e zaz da benn
Da c'houarn pur ar lezen gristen.

7

Er c'houlz-se, tud vije neuzen
Stropet get klenwed ar vossen,
Hag ar loned skoet get on œl
E goec'he nemb gellout herzel.

8

D'ar gristenian, tup milliget,
Ar golheur-se oa tamallet :
Ha chetu kentec'h, ar brezel
Evithe dre Rom, e sewel.

9

Zant Kornely ! dre hou sikour
En oll d'ho drouk gawe rekour :
Tud ha loned, lan a ihed,
Vouche-d'ho koalenn alaoret

10

Hirio en dei, meur a glenwed
E skoa en dud hag ar loned :
El gwec'herel, Zant Kornely,
Diouallet ar c'hraou hag hag en ty.

11

Ar goed kristen reide berped
Didan koutel ar baianed :
Ha Kornely, er pap santel
Ewit i fei renkaz merwel.